

333

6

# CHANSON AR SOUBEN LEZ NEVEZ

## VAR UN TON DIVERTISSANT

En eur gommanç canan, excus a c'houlennan  
Digant kement hini a so presant aman.  
A beurs eun oac'h yaouank, din a oa ordrenet  
Rei dean souben las, nos kenta he euret.

Mes en lec'h souben les, me rei d'ac'h da danvad  
Malaga ha Champagn, liqueurio dilicad  
Biscoas ne oa evel sort gante bars ar vro.  
Me meus gret ho digaç express deus a Vordeaux,

Na neus prinç, na baron, roue, nagempereur  
A guement ma nefe tanveet ma liqueur,  
Pa zon deuet express evit ho regali  
An tanva kenta a so d'ho pried a c'houi.

An eil tanva a zo d'an daou zen a heñor  
An neus ho conduet eus tol hon Redemptor,  
An drede tanva nei so do mam ha do tad,  
Pere a deus glac'har ho tonned do couitat;  
D'ar bevaret a bedan breudeur a c'hoarezet,  
Kement hini ho car, querent ha mignonnet.

AR PES SO AMAN VOAR LERC'H A VE PROPR DA GANA  
EUE TOL DA EUN EURED

An devez a hirio, pebec contantamant,  
Guelet an diou famill, ha kement so presant  
Aman nem assamblet gant cals a garante,  
Diredet oll gant joa d'henori an dud neve.

Na gredant quet a ve den er gompagnunez  
A guement a nefe nep sort tristidiguez,  
Gouscoude meus clewet aliez lavaret;  
Er bed man na neus quet a vouir evurustet.

Bezan e glac'harus vit eur vam hag on tad  
Pa welont ho bugale ho tenned d'ho couitad;  
Maguet ho deus int bet gant teeridiguez,  
Ha rei d'he ho chonje dont er priedelez.

Breman daou zen yaouanc, c'houi a vo obliget  
Da zont d'ho c'honsoli queit ma vouint var ar bed  
C'houi a heus bet ive glac'har ha calounad  
O tont da guimiadi eus ho mam hag ho tad.


Ao kalon so bet treuzet gant ar glac'har  
Ho laret kenavo ha do preur ha do c'hoar,  
Bemde oac'h assambes neun union barfet,  
Hag en nos hag en de, c'houi so en em garet.

Gant ho bolonte vad e zoc'h nem separet,  
Ha cetu c'houi breman unisset d'eur pried,  
Kenavo tad ha mam, breudeur ha c'hoarezet,  
Me ha ya da zele'hel menaj gant ma fried.

Ar briedeles he kaera tra so her bed,  
Gant Doue he unap e bet etablisset,  
Pa oa krouet Adam gant Krouer ar bed-man,  
E neus roet Eva evit pried dezan.

Naiket a doliou morzol e ve formet an den  
Na hac doliou dorn e ve piket ar men  
Ebars en eur gouele en kreiz tre an insellou  
Ken a strakai ar gouele a ma fichai ar holo.

Rag se, daou zen yaouank, kemeret confianç,  
Ha Doue a rei doc'h prosperite ha chanç  
Ha nem garet bepred gant guir fidelite,  
Savet ho pugale en earante Doue,  
Ha pa zeui ar maoro do separi ho taou,  
Graç d'oc'h da nem gavet assambles en envou.



# JUJAMANT AR MESVIER

## A TRISTIDIGUEZ E DUD

Composet er blavez 1905

### VAR UN TON TRIST

Oh ! te den losq a fragil, oh ! te na sonjez ket  
Laret pèd guech da-Zoue, o heus bet prometet  
A renonses dar boesson, guel a ve dit mervel  
E vit na ve cometi, cant mil behet marvel.

Pa be evet eur bane, a garfez caouet dec  
Deut eo an heur da zonzal, hoas na mont ket abret  
Ober a ra da valeur, a hini da real  
Da dud a zo er jagrin, poënt bras eo dit dioual

Var digare lavaret, penz a vez diez  
E zout bet da guemer, banahou aliez  
Ouspen e teuz da guemer, aliez pemp a houec'h  
A cctu neuze clan braz, calz a jagrin a nec'h

Ouspen hoas te a jagrin, da vrec da vugale  
A kemen zo var da dro, zo tourmantet neuze  
Coll a rez ive da enor, da reputation  
Da ene a zo siouaz cazi en abandon

Gra breman reflection, guel gant da zaou lagat  
Tout pen da-ben da vuez, peguemment eo ingrad  
Da vrec a da vugale, goude beza yaouanc  
A scuill cals daëlou houero, gant an nec'h a tourmant

A houi bugaligou guez, avans a red en oad  
O chagrin a vo ep fin, mar na chanj ket o tad  
Er baourente ar vrassa, a guemente ze on sur  
A goal dretet aliez, po met displijadur

Chomp ep gonit aliez a dispign noz a de  
Goude dispign e arc'hant, hoaz a guemere gle  
A goude a vo clan bras chom a rai ne vele  
Neuze houi bugale baour, a vo er baourente

Houi grec a bugale guez, truez eo o kuelled  
O ouella o hirvoudi, tro var dre dan oaled  
O tillajou a tal, matreze ep tam tan  
Eun druez eo kuellet, bugaligou vian

O kueleou a zo fal, matreze bugale  
O mam a zo en tourmant, a houi a zo ive  
A hoaz e halfe siouaz mankout boued eno ti  
A no puez nemet eun tad, evit o tourmanti

Partout lec'h ma dremeno, na pakin nemet mez  
En tu al do tourmanchoù, a do tristidiguez  
Distrujo e ra e gorf, ac ouspen sonjit mad  
An hini a vevo fal, a varvo neur goal stad

Dont a ra de nem zaoni, ober d'och dienez  
Eur goal scuier eze ezeo ive, ouspen bugale guez  
Rebutet eo gant e dud, couls a gant e nessa  
Daounet a vo er bed all, disprijet er bed ma

Dispign a ra e arc'hant, tracas nec'h a mizer  
Sellit a guellit o stad, breman paour kez mesvier  
Deut dober reflection, da lakad no spered  
E deur heuil ar sort buez, petra a honeed

Sonjit mad er chanchamant, tre houi ac eun den fur  
Ac o velfet en pelec'h, ema ar blijadur  
Gant tud fur ema eüruz, o bugale  
Contantamant plujadur, a eil gant eguile

Deus da lavaret breman, mes lavar o galon  
Ret a vo deus a vremen, dilezel ar boesson  
Guel a ve dide mervel mar varvez neuze stad vad  
E vit na ve birviken, dont da eva eur berad

Ar brezel a vezo stard, eur veich habitued  
Nemes gant sicour Doue james na vanko ked  
Rac hounez e zo ar pen, deus an oll valheuriou  
Eao ema ar zoursen, demeus an oll visseou

Neuze Doue pa velo, a heuz bolontez vad  
Teuyo gant joa de sicour, da zont deus da oal stad  
A te demeus da gostez, renko combati ferm  
A renta brezel bemde, de brisson an efern

Na neus ket malheur a bet, siouaz bars er bed-ma  
Evel hini ar mesvier, henez eo ar brassa  
Soursen eo da oll visseou, mam an oll valheuriou  
Distruja ra net ar horf, a laze en epoou

Deus ar pounera croasiou, roet deomp gant Doue  
Tout an nec'h ac ar glahar, mizer a paourente  
A vezo recompanset, gant eur mest dous a mad  
A pa zeuio ar maro, a vo fin dar gombad

Nemet ar paour kez mesvier goude e dremenvan  
A hel lavaret hardi, ma flas a zo en tan  
A couskoude ar vuez, a zo poaniuz a ber  
An eternite a zepand, deus or buez antier

Ar c'hlemou man zo rimet, gant calez a c'hlabar  
Goude eur bromessa ferm, a zezir ar pouvoir  
Dar hallout nem rezolvi, keit a ma vo er bed  
Da renons da virviken, dar boesson miligued

FIN

Corentin BOUARD,  
deus Collorec.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC Yves.

# CHANSON NEVEZ

## Composet var sujet an daou Bichon yoane

### Var un ton Nevez

Didostait coz a yoane  
Didostait da glevet  
Hui ive paotret yoane  
Ha hui ive merhet.

Da zilaou cana eur chanson  
Composet er blama  
Zo gret da zaou den yoane  
Vit en em divertissa.

An antretien guenta  
A oa bed entrezai  
Voa da Barbon ar Relec  
En escopti Kerne.

Eno en nem salujont  
An daou Bichon yoane  
Eno en nem racontjont  
An diou galon gontant.

Salud femelen charmant  
Rouanez ar guenet  
Biscoas hini nemandoh  
Na charmis ma speret

Me zezir hô condui  
Eun dro en assamb lai  
Voar sujet an dimizi  
E cozefomp ive.

Ar plah a juntr e daoarn  
A zel trezec an env  
Betec ama ma servijer  
Me moa brevet dineh.

Betec ama ma servijer  
Dineh me moa bevet  
Non quet vit ho respont  
Deus ar pezh a leret.

Petra ta minorezi  
Nag a rafai neh d'ech  
Deus ar homzou favorab  
E moa lavaret dech

Ma noh qet santimantet  
Da zimizi er blama  
Laquet dime eun termen  
Me hortio anezan.

Ar plah a respont dezan  
Oh ya en eur guir cren  
En tuman da zaouzec vla  
Da neubeuta termen.

A chon kiet se emezi  
Hep cavet conje va zad  
Chon kiet en port neant  
Dal deh eun dra benac.

Conjai ho tad plah yoane  
Me ne houlenan quet  
Nemet gortoz an termen  
Pehini poa din laquet.

Na gant ma timunufoch  
Eur blavez beb trimis  
Me a chomo do tarempred  
Ma douç en honestis.

E pad teir heur horolaj  
Pe eur peder heur gren  
Hint bet en em zisput  
Ho daou voar eur goadem

Hag evit krenna berroh  
Hint disquennet dan traou  
Eur spas deus bevar mis  
Hep en em velet ho daou,

Ben eur pevar mis goudai  
Pe heur pemp dan hirra  
E nem gavehont assambles  
Nag o daou da leina.

Ma zella quen an tirant  
An œil deus eguilai  
Mes ne voant que evit parlant  
Re hir voa entrezai.

Pa finissas ar repas  
A savet tout an dud  
Neuzai e voa comancet  
Entrezai an disput.

Mont a rejont da barlant  
En eur plaç a gostez  
Eurius a Marvaillus  
Voa clevet anaizai.

Me hoari gane braima  
Vel gant eur hefelec  
L'eh ma ve yen an amser  
Me a nem blij bepret.

Hag en ho quichen va mestres  
E nem blijan ive  
Koulcoudai e meus klevet  
Eo en ho amitie.

O salcroas den yoane  
Kement se a zo fos  
Ne nit quet ma speret  
Nag en dez nag en noz,

O klevet coms ahanoh  
A ra vad dam speret  
Non quet biviken jamais  
Vit ampœch do karet

Me hoari ganem brema  
Nag en guis da eun oan  
Zo eun den abandonet  
A lezet va unan.

Ac evel eun esclavour  
E qredan d'ho comzou  
Divoallit plah yoane  
Na rafeh goab a hanon.

Ma ramai goab ahanoh  
Evel ma leveret  
Chomet er guer den yoane  
A neuzai na rin qet.

Chanç vad d'eh a reqetan  
A din da brofita  
Kena vo ta den yoane  
Kenavo ar henta.

Brema e credan facil  
Ae pezh a meuz lennet  
Hag e caver er scridou  
Comzou ar Prophetet.

Karet heb beza caret  
A zo abominab  
Doue lavar quement ma  
En eur scuilla e oad.

Ne gredan qet den yoane  
E pefai dizenor  
E tarempred eur feumeulen  
A gren dostie d'ho tor.

Va zad ya mam voa honest  
Va unan ezon ive  
Ya herent ha va lignez  
A dal ho re bemdez

Ne garfen qet minorezi  
Evit aour bag arhant  
Dierial deh ho lignez  
Ma na veh qet contant.

Gant calz denz a blijadur  
Me zo bet en ho ti  
Kantguech hep conta ar henta  
Ho eva ho tibri.

Me ho ped postret yoane  
Pere a ren ar bed  
Na laquit qet ho speret  
Da regarout merhet.

Me meus laquet va speret  
Da regarout unan  
Hag e meus va hroas nocun  
Da recompans d'an poan.

# CHANSON AN AMOUROUSTED

Chilaouit, ma mignonnet,  
Chanson an amourousted  
A zo gant eur c'hernevad vit an deio composet

Amourousted zo eur guer  
Hae a zo douç ha tener  
Caus he da vil nec'hamant hag ive dal vil mizer

Pa vo an noz pe an de  
Daou zen yaouank a goste  
Quent ma c'houlfeong doare he c'haruo gante

Ar pot a goze brao  
Hac ar plac'h a deus foa.  
Evit beza evurus na fot nemet eun dra.  
Amourousted a ra dhe  
Dimezi heb dale.

Pa vouing neve eureuget,  
Vad a ra d'he n'em velet,  
Casi na ra met unan an oac'h hag ar vreg.

Quen bras e ar garante  
Ha quen bras an amitie  
Neus an eil vit egrite hag en noz hag en de,  
He ra de ze lavaret  
Pell zo clefemp beza dimeet.

Tudo yaouanc, me ho ped,  
Memes tra divoallet,  
Liessoc'h zo dimezet vit a zo ezet.

Guelet a meump a vejou  
Cals a chanchamanchou,  
Er menajou e caver bep sort ambarrassou,  
Pa zeu en teguezou  
Cals deus a bouponou.  
Unan a c'houlen crampoës  
Hac eun all galletez.

Eun all zo en he gavel ho clasq donet er mes.  
Ar vreg so dre an fi  
Vel pa ve etourdi  
Na neus den evit clevet reson vad ebet ganti.  
Fachet e deus e fried  
Adieu d'an amourousted.

Tud yaouanc, mar em c'hredet,  
Lacait eves, diouallet,  
C'houi he an evurussan tud a so voar ar bed.

C'houi so dre ar pardonniou  
Ha dre an assambleou;  
O tansal, o c'hebattal, o c'hevan taquennou.  
Eun den yaouanc, mar gue fur,  
So parfet he blijadur.

Hac ar re so dimezet  
An darn vuyan meus goelet  
Avanque eun dra benag d'alc'hmad do evurustet

Darn so hac a laer ar yalc'h  
Ha darn all e ya war vare'h,  
Re all a gar ar chopin, quen azvont me wawalc'h  
Tud yaouanc, mar dimeet  
Choaset tud fur ha parfet.

## PA HI LERER EN EUN EURED A HELLER AJOUTI

He neur dont da finissan  
Souhaiti ferm a ran  
Yec'het dan daou zen neve, chanç a prosperite.

Men ho ped, camaradet,  
Vit eur farç ne fachet ket :  
Permettet e badinal en tre ar vignonnet.

Grac dimp da nem gavet c'hoas  
Joaus evel biscoas  
Ben an de-ma pen eur bloa, ebars ar memes plac  
Ho trinka gant ho goeren  
Ho trinka gant ho goeren

LENEINDRE.